

(53, suite)

Ar c'his ancien
hac ar c'his a so bremâ.
chanson.

Guechal ne voa son abet,
Rac ne voa get a sujet,
Ar best a voa muerbed parfet:
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Bremâ zo calz oc'h ober rimou,
Muio'h c'hoas oc'h ober sotizou;
Ne veler qey carzi dre ar vro:
Hounnes eo ar c'his a zo bremâ. (bis).

(54) Guechal e voa ay henor
Hac ar merit a rē ay decor,
Digor e voa dezi ay nor:
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Bremâ eo lofi'c'h ha pinvidiguez
A vez preferet alies
D'ar honestis ha d'ar furnez:
Hounnes ar c'his a so bremâ. (bis).

Guechal e voa ar velezen,
Ay noblanç hac ay dud a bluen
A zouque montr e peb tachen:
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Bremâ bete gant mevellien,
Pautret-saout ha gemenerrien
E veler montr pe ur chaden:
Hounnes ar c'his a so bremâ. (bis)

(55) Guechal e zeus bet un amzer
Ne voa get autrou ar stouper,
Guisquet e voa herves e vicher:
Hounnes voa ar c'his ancienna.

Mes abaoe m'en deus fos-chemis,
Var costez e beay un tocq bourc'his,
E coll ar furnes gant ar c'his:
Hounnes ar c'his a so bremâ. (bis).

Guechal ebars peb quiaden
E devoa peb matez e steuen,
Cetu eno e zoalleten
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Mes bremâ merc'h ur c'hlasger boued
A zoug voulous, franch, colinet,
Ur schal, ur c'hoef danteleget:
Hounnes ar c'his a so bremâ. (bis)

(56) Guechal ar yaouanqizou
Na yent get d'ay hostalirion,
Na ne chomment get meo ey hentchou.
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Ober deboch ha chom da roulla,
Epad ay nōs chom da eva,
Ha goude-se tēvel a rān:
Hounnes ar c'his a so bremâ (1). (bis).

Guechal ar merc'hed yaouanq
A chomme pell ha fur ha coant,
Rac na event get a vouin-ardant
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Istre evit merc'hed va c'hanton,

(1). - Dans le ms., le vers est, par inadvertance:
Hounnes ar c'his ancienna.

384

A lip brema o forsiou,
Hac a gaillar o c'hotillon:
Hounnes ar c'his a so brema. (bis).

Guechal ebars en amzer gos
E range ar merc'hed, gent an nos
Beza er quér, pe caret cros.
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Mo. brema eo chenchet an heur,
Hac ar vam na gross get nemeur (57)
Na deus a se nac eus a valeur,
Hounnes ar c'his a so brema. (bis).

Merc'het yaouanq, un amzer so bet,
Na gasse d'o doug gourc'hemen abet,
Rac na vijent mui estimet.
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Brema eo collet privilach an toeq,
Hac e zeo ar merc'hed a ya aroc,
Ne ra fors bete caout ur pot.
Hounnes ar c'his a so brema. (bis).

Guechal ebars en hostalirion,
Etre ma pade an offiçou
E vije serret an dorrojou.

Hounnes voa ar c'his ancienna.
Brema evit lipad hoc'h arc'hant,
En deiz, en nos, ha pa ho peiz c'hoant,
E vez digor d'ar feneant. (58)
Hounnes ar c'his a so brema. (bis).

Guechal, ebars en amzer ancien.
E vije clêvet ar gannerien
O cana sonniou brao ha laouen.
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Mes, brema n'o deus nemet sonniou sot,
Hac a bren gouscoude ar public diot?
Mes, convenomp: da bieu eo ar faut?
Hounnes ar c'his a so brema. (bis).

Plijout a rayo sur va chanson
D'an nep en deus sans ha rêson
Dre ma zeus enni un nebeut gisirion,
Hounnes voa ar c'his ancienna.
Mes bet droug gant an neb a garo,
Nep en deveus gâl en em grafo,
Ha demeus an autor a facho.
Hounnes ar c'his a so brema.

fin.

(Vol. IV, p. 53 - 58.)
12 str. non numérotées.